

## skol-hañv2 2010

Nevesaat Diwezhañ Thursday, 15 April 2010

K.E.A.V.Skol-hañv 2010 PELEC&rsquo;H ?Dalc&rsquo;het e vo Skol-Hañv 2010 KEAV e Lise ar Stêr Aon (lise labour-douar ha liorzhouriezh) e Kastellin.

PEGOULZ ?

Div sizhuniad studi a vo kinniget er bloaz-mañ.  
- Ar sizhuniad 1añ (4/10)

Eus ar Sul 4 a viz Gouere da noz (da 7e noz evit an digor-kalon, da 8 eur evit koan) betek ar Sadorn 10 da greisteiz.  
- Eil sizhuniad (11/17)

Eus ar Sul 11 a viz Gouere da noz (da 7e noz evit an digor-kalon, da 8 eur evit koan) betek ar Sadorn 17 da greisteiz.

Gallout a raer dibab dont d&rsquo;ur sizhuniad studi hepken, pe d&rsquo;an div.Degemeret e vo an dud adalek 6 eur goude merenn PETRA VO GRAET ER C'HAMP ?

Eus 9e da 12e hag eus 2e da 5e e c'helloc'h dibab etre :Sizhun gentañ hag eil sizhunvezh

- Studiañ ar yezh e kentelioù aozet a rummadoù bihanPe : Diouzh ar sizhunvezh dibabet ganeoc'h : Sizhun gentañ  
- Pleustriañ war ur sitkom : Kompren, skrivañ aozañ, c'hoariPal ar sizhun a vo kompren petra eo ur sitkom ha welet an hentenn pazenn ha pazenn betek dont a-benn da sevel unan. Dizoloet e vo ar micherioù liesseurt a zo stag outañ : skrid-aozer, komedian, kinkler.

- Distagadur &ndash; pouez-mouezh (live 1)Labourat da wellaat an doare da gaozeal war diazez ar fonologiezh, pleustradennoù. Ar stajidi a labouro evit anaout "musik" ar brezhoneg, kompren ar sistem reolennoù diazez a zo dioutañ, hag evit reiñ da glevet ar muzik-se.Eil sizhun

- Distagadur - pouez-mouezh (live 2)Mont a raio ar stajidi pelloc'h eget ar "santout" hag ar "c'hompren" : Laket e vint da bleustriañ war an distagañ / taol-mouezhiañ, dre labourat war un danvez skrivet ha prest dija (pennadoù kaoz tennet eus filmoù, kontadennoù, sketchoù....).

- Deskiñ implijout ar video, sevel filmoùMont war-raok gant ar brezhoneg oc'h implij anezhañ evit sevel filmoù berr. A-hed ar sizhun e vo savet kelfilmoù diwar-benn a bep seurt danvezioù, (buhez e KEAV, buhez e Kastellin), pe faltazioù bihan.

- KazetenniñAr pal zo stummañ tud hag a c'hello goude sevel pennadoù. Labourer e vo war diazezoù ar c'hazetenniñ, aozañ emgavioù ha mont da welet tud ar vro, dastum danvez, sevel pennadoù. Dindan "Bruderezh" e kavoc'h program ar rummadoù kentelioù-se. Hag evit an holl :

Da greisteiz : 1/2 eurvezh kan ha dañs diouzh kinnigoù ar gelennerien.

Goude 5 eur (diouzh an deizioù) : mont da welet brezhonegerien eus ar vro, sportoù, kaozeadennoù, stalioù-labour a bep seurt, filmoù, pourmenadennoù, c'hoarioù. PEGEMENT ? (Priz evit ar c&rsquo;hentelioù, boued, lojeiz hag all.)

250 Euro e kousto pep sizhuniad staj. Ret eo paeañ an hanter (125, pe 250 Euro diouzh ho tibab) a-raok dont ha kas ar chekenn gant ar follenn-enskrivañ da gKEAV.

220 Euro e kousto ur sizhuniad evit ar studierien hag an dud dilabour (kas an hanter : 110, 220 Euro, diouzh ho tibab).  
EVEZHADENN

Skol-hañv KEAV zo anezhi ur bodad tud laouen oc&rsquo;h en em gavout asambles evit klevet hag evit komz brezhoneg e-pad ur sizhun pe div. Anez gouzout diazezoù kentañ ar brezhoneg (ur bloavezh studi pe zaou) n&rsquo;hall ket staj KEAV dougen frouezh deoc&rsquo;h. Degas a reomp da soñj d&rsquo;an deraouidi e vez aozet stajoù evite er memes mare. Evit deoc&rsquo;h kaout titouroù e c&rsquo;hellit goulenn diganeomp. KENTAÑ HA DIWEZHANÑ EVEZHADENN E GALLEG

Le camp d&rsquo;été de KEAV, c&rsquo;est quatre-vingts, cent personnes heureuses de se rencontrer pour entendre et parler breton. Pour chacun, le faire c&rsquo;est un choix, un plaisir : pour respecter cette volonté commune, chacun s&rsquo;efforce de s&rsquo;exprimer uniquement en breton. Cet effort est également un élément indispensable de l&rsquo;apprentissage. Le stage de KEAV est connu pour cela. En s&rsquo;inscrivant, chacun est donc conscient de l&rsquo;engagement auquel il souscrit.

LE BRETON EST LA SEULE LANGUE UTILISEE PAR TOUS AU COURS DU STAGE

Ce stage ne peut profiter véritablement qu&rsquo;aux personnes ayant des bases élémentaires suffisantes du breton. Nous rappelons qu&rsquo;il existe des stages pour débutants à la même période.

Pour d'éventuels renseignements n'hésitez pas à nous contacter..

Un niverenn stummadur dibaouez a zo gant KEAV (Formation continue) Petra zo da ZEgas ganeoc'h ?

- ur sac'h kousket + ul liñsel (pe 2 liñsel ha pallennoù)
- ur goubenner
- peadra da skrivañ, ho yezhadur, ho keriadur, ur c'haier, ur sonenroller ha kement zo
- na zisoñjit ket tapañ ho pinvioù-seniñ (gitar, bombard, binioù, telenn, banjo...), c'hoarioù (bouloù, paledoù...)
- filmoù da ziskouez (e brezhoneg), pe dastumadegoù kanaouennoù, ha kement zo
- dilhad ha botoù sport- dilhad neuial.